

**Dizano c**

## **Julig ar Ververo**

Me 'gave din, gwech dimezet,  
*Julig ar ververo,*  
N'am-ije greet netra ebed,  
*Juliver tonti, juliver tonton,*  
*Julig ar ververo,*  
*Daoulagad a skuill daelou'...*

Padal e rankan ober toud,  
Aoza krampouez ha frita yod.

Ar pezh a gavan gwasoh c'hoaz,  
Eo pilad lann gand va zreid noaz...

Dimezet on d'eun ever gwin  
A ya d'an davarn beb mintin.

Ar gwin a ev 'leiz e werenn  
N'eo ket gwin ruz, med gwin melen.

D'an davarn e ya mintin mad,  
D'ar gêr e teu gwall ziwehad.

Nezue 'komañs al langachou,  
Ar malloziou, ar bahadou.

Ne glevan ken nemed : « Kerz kuit !  
An ti 'zo din, ar mêz 'zo dit ! »

An dud yaouank, pa zimezont,  
Ne ouzont ket Petra 'reont.

C'hwi, tud yaouank dizimez c'hoaz,  
'Raog dimezi, grit mad ho choaz !...